

**Prenestr digor war ar c'hlewed e brezhoneg
Fenêtre sur l'audiovisuel en langue bretonne**

**Etre ar Yaou 27 hag ar Sadorn 29 a viz Eost
Du jeudi 27 au samedi 29 août**

**32e Gouel ar Filmoù / Festival de Cinéma
de Douarnenez**

**22-29 a viz Eost / août 2009
Pobloù ar C'haokaz / Peoples du Caucase**

13 rue Michel le Nobletz - BP 206
29172 DOUARNENEZ CEDEX Bretagne / France
tel. +33 (0)2 98 92 09 21 fax. +33 (0)2 98 92 28 10

Fdz@wanadoo.fr
www.festival-douarnenez.com



Bemdez e wel tud ar Festival ez eo bev-birvidik ar c'hrouiñ e bed ar c'hleweled e brezhoneg. Graet o soñj gante neuze lakaat war-wel disoc'hoù nevesañ ar c'hrouiñ-se, en ur skignañ filmoù hag en ur aazañ emgavioù etre ar grouerien hag ar sellerien.

D'ar Yaou 27 a viz Eost, e Ti ar re yaouank hag ar sevenadur :

- Da 3 eur abardaez : **Taol-grenn evit kinnig « rummad ar c'hleweled e brezhoneg » hag ober stad ar produiñ e brezhoneg.**

- Da 5 eur : **Abadenn ispisial gant filmoù faltazi e brezhoneg (hep istitloù), ha da heul, diviz war ar c'hrouiñ filmoù faltazi e brezhoneg.**

Abadenn genta BRZ gant Michel Tréguer, 1981, 29', Breiz o Veva / INA

Ar bloavezh 1981. Hunvreomp un tamm... piv 'oar ? Krog eo ar gouarnamant nevez da cheñch traoù zo : 'blamour da betra ne vefe ket roet ur chadenn skinwel, e brezhoneg penn-da-benn, d'ar Vretoned ? Abadenn gentañ BRZ eo... abadenn gentañ ar chadenn nevez-se, gant e animatourien dirollet. Fentus ha farsus eo kement sketch kinniget en abadenn-mañ, bet skrivet gant J-C Bozec ha kinniget gant Rozenn Milin.

Leurenn BZH gant Sonia Larue, 2007, Pois Chiche Films / TV Rennes 35 / Dizale / MAPL

Un heuliad filmoù faltazi berr diwar buhez pemdeziek skipailh ur sal abadennoù e kêr. Troioù-kaer hag istorioù foll ur strollad tud diroll, ijin ha faltazi o virviñ enno. Filmoù fentus ha divergant, yaouank, digustum, berv evel ur banne sistr distoufet a-nevez !

Ken tuch' gant Étienne Strubel, 2008, Dizale / Lionel Buannic Krouiñ

Seizh studier hag ur c'helenner... e-barzh kegin ur Cité U ! Nag a draoù o devez da gontañ : kentelioù, karantez, dilhad, boued, paotred, merc'hed, labour...

Ur sitcom droch ha farsus, bet skrivet ha filmet en ur brezhoneg bev : hini tud yaouank ar bloavezhioù 2000, evit brasañ plijadur ar re vras hag re vihan !

D'ar Gwener 28 a viz Eost da 2e er sinema Le Club : evit ar wech kentañ !

Brendan ha sekred Kells gant Thomas Moore (2006, 1e15). Hep istitloù

Film nevez-advouezhiet gant Dizale. Adalek 7 vloaz

En Iwerzhon an 9vet kantved, e-barzh abati kreñv Kells, emañ Brendan, ur manac'h yaouank daouzek vloaz, o vevañ. Roiñ an dorn a ra Brendan hag ar frered all da sevel ur voger-greñv, a dalvez da zifenn an abati a-enep d'ar Vikinged. Ober a ra Brendan anaoudegezh gant ar Frer Aidan, ur mestr enlivour meur zo ul levr enlivet burzhodus, brudet met diechu, en e zalc'h. Ha krog neuze an troioù-kaer eus ar souezhusañ !

Gant Aidan e tesk Brendan arz an enlivañ, ha diskouez a ra bezañ donezonet-euzhus war an arz-se.

D'ar Sadorn 29 a viz Eost, diouzh an noz, war ar blasenn :

Skignadenn ur film faltazi berr e brezhoneg, savet e-pad ar gouel !

Raktres nevez : emgav o deus tud yaouank zo, stummet war micherioù ar c'hleweled e brezhoneg, war blasenn ar Festival. Kloustore e vint kap da sevel ur film faltazi berr da vare ar Festival !

Fellout 'ra da skipailh Douarnenez roiñ kalon d'ar re yaouank-se, c'hoant gante kemer perzh da vat en darvoud en ur mod dic'hortoz, pa'z eo ar Festival ul lec'h kejañ, eskemm war e skiant-prenet, ober taolioù-esae... ha krouiñ ivez moarvat ?

Emgav gant an holl neuze, e fin ar Festival, evit gallet arvestiñ an disoc'h...



Hag ivez a-hed ar sizhun...

Filmoù e brezhoneg a zo bet dibabet e-barzh Dreistdibab Breizh 2009, ar filmoù bet produet ha graet e Breizh e-pad ar bloavezh. Ar filmaozerien a vo war blas evit kinnig o filmoù.

D'ar Meurzh 25, da 4 eur, er sinema Le Club :

Me oa deut da vezañ hardizh, gant Thierry Compain

TeulFilm / 2009 / 26mn / France 3 Ouest

Distro d'an Enez-Veur gant Héléne Baudour, ur plac'h a benn. Kontañ a ra deomp he bugaleaj, he labourioù kentañ hag he saviad a vatezh, he buhez gant he gwaz martolod, an amzer, ar beajoù... Gant gerioù gwirion e kont pegen bras 'oa he c'hoant da zeskiñ, da c'houzout, da vont war-raok, da gompren ha da zont a-benn. Ur sell lemm ha leun a fent war an dud hag ar bed eo hini Héléne Baudour.

D'ar Merc'her 26, da 4 eur, er sinema Le Club :

Leurenn BZH 2, gant Sonia Larue

Produet gant Pois Chiche Films, TV Rennes 35, Dizale, MALP, La Découverte

Eil bloavezh un heuliad filmoù faltazi berr diwar buhez pemdeziek skipailh ur sal abadennoù e kêr. Troioù-kaer hag istorioù fall ur strollad tud diroll, ijin ha faltazi o virviñ enno. Filmoù fentus ha divergont, yaouank, digustum, berv evel ur banne sistr distoufet a-nevez !

Hor taol-from : Super du pod... 'enep ar fazioù brezhonek. Pa n'eo ket aes deskiñ brezhoneg..

O seizh posubl, gant Soazig Daniellou

TeulFilm / 2008 / 52mn / Kalanna Production, France 3 Ouest

E 1997, evit ar wech kentañ, e kase ar gevredigezh Diwan o liseidi d'ar vachelouriezh. Alan, Bleuenn, Maela hag ar re all a zo tost tregont vloaz hiziv. Pep hini en deus toulet e hent ken keñver micher, ken keñver buhez prevez. Petra o deus bet graet ha petra a fell dezho ober gant ar yezh a zo bet fiziet enno. Petra eo ar brezhoneg bremañ evito ? Un teñzor, ur chañs, ur samm ? Ha prest int, evel o zud, da gas o sevenadur war-raok ? Gant skeudennoù bet tapet p'edont c'hoazh er skolañ hag el lise, ha skeudennoù a-vremañ, e klask ar film mont d'o heul war an hent dibabet gant pep hini, an holl anezho o lodenniñ, abaoe o bugaleaj, ul liamm bev ha start, hini ar yezh.

D'ar Yaou 27, da 6 eur 30, e auditorium ar vediaoueg :

Hent-dall, gant Sebastien Le Guillou

TeulFilm / 2008 / 15mn / France 3 Ouest

Priz ar gwellañ film-tele da geñver Prizioù 2009 France 3.

Setu tremen tregont vloaz zo ez eo dimezet Ida ha Guy. Bevañ a reont en o zi, e Plùned. Padal n'eo ket aes bemdez dont a-benn da gas pep tra war-raok. Ida a zo dall, kollet he daoulagad ganti da ugent vloaz. Guy, eñ, n'en deus nemet ul lagad ha ne wel takenn koulz lâret. Ha pa lakfent pell d'ober traoù zo e ouezont ivez kaout plijadur ha plijadur hon eus gante !

Hag ouzhpenn, d'ar Sul 23 : abadenn ispisial an INA Atlante!

Charlez Ar Gall, brezhoneger penn, kil ha troad, gant Marie Kermarec

TeulFilm / 2001 / 20mn / France 3 Ouest

Charlez Ar Gall ? Paotr kentañ ar brezhoneg er skinwel. E 1964 en doa ur vunutennig hanter evit kaozeal. Ouzhpenn e labour a skolaer en doa sammet war e choug an abadennoù brezhoneg evit ar radio, skoazellet gant e bried Chanig. Betek 1974 e oa bet gwelet war skramm Roazhon Breizh. Charlez Ar Gall ? Ur stourmer penn, kil ha troad war dachenn ar brezhoneg.

Ha da heul, un teulfilm hag un diviz war **istor an tele e Breizh**, graet gant Louis-Marie Davy ha Patrick Gay e 1990.



Témoin d'un renouveau de la création audiovisuelle en langue bretonne au cours de ces dernières années, le festival a décidé de mettre en avant la production récente, à travers des projections de films mais aussi des rencontres avec le public.

Judi 27 août à la MJC :

– 15 h : **Table ronde pour une présentation officielle de la « Filière audiovisuelle en langue bretonne » et un état des lieux de la production.**

– 17 h : **Séance spéciale Fictions en langue bretonne (versions non sous-titrées), suivie d'un débat autour de la création de Fictions en langue bretonne.**

Abadenn genta BRZ de Michel Tréguer, 1981, 29', Breiz o Veva / INA

Nous sommes en 1981. Rêvons un peu... et imaginons que, dans le cadre des changements qu'il a entrepris depuis sa nomination, le nouveau gouvernement ait décidé d'accorder une chaîne de télévision toute en breton... ! « Abadenn genta BRZ » est la première émission de cette nouvelle chaîne, qui se déroule dans le délire, en une suite de gags tous plus drôles les uns que les autres... Ecrite par J-C Bozec, cette émission est présentée par une certaine Rozenn Milin.

Leurenn BZH de Sonia Larue, 2007, Pois Chiche Films / TV Rennes 35 / Dizale / MAPL

Une sitcom drôle et impertinente qui relate la vie et les coulisses d'un cabaret de seconde zone. Le ton est décalé, c'est décapant, fort en autodérision. Et qui plus est en breton !

Ken Tuch' de Etienne Strubel, 2008, Dizale / Lionel Buannic Krouiñ

Sept étudiants et un professeur... dans la cuisine d'une Cité U ! Tous se racontent leurs déboires : les cours, l'amour, les fringues, la bouffe, les filles, les garçons, le boulot... Ken Tuch' est une sitcom désopilante, écrite et filmée dans un breton vivant : celui des jeunes des années 2000, pour le plus grand plaisir des grands et des petits !

Vendredi 28 août 14h au cinéma Le Club : **Avant-première de Brendan ha sekred Kells**

de Thomas Moore (2006, 1h15). Version non-sous-titrée. A partir de 7 ans.

Dernier film d'animation doublé par Dizale.

C'est en Irlande au 9e siècle, dans l'abbaye fortifiée de Kells, que vit Brendan, un jeune moine de douze ans. Avec les autres frères, Brendan aide à la construction d'une enceinte pour protéger l'abbaye des assauts réguliers des Vikings.

Sa rencontre avec Frère Aidan, célèbre maître enlumineur et « gardien » d'un Livre d'enluminures fabuleux mais inachevé, va l'entraîner dans de fantastiques aventures. Aidan va initier Brendan à l'art de l'enluminure pour lequel le jeune garçon révélera un talent prodigieux.

Samedi 29 août, en soirée, sur la place du festival :

Projection d'un court-métrage de fiction en langue bretonne réalisé pendant le festival.

Un nouveau projet : des jeunes professionnels de l'audiovisuel en langue bretonne se sont donné rendez-vous sur la place du festival avec comme défi la réalisation d'une fiction courte en langue bretonne sur la durée de l'évènement. L'équipe de Douarnenez tient à encourager cette jeune génération désireuse de s'approprier le festival, lieu de rencontres, d'échanges de savoir-faire et terrain d'expérimentation... et pourquoi pas de création ?

Rendez-vous à la fin du festival pour voir le résultat !



Et tout au long de la semaine...

Des films en bretons ont aussi été retenus dans le Grand cru Bretagne 2009, notre sélection de films réalisés ou produits dans l'année en Bretagne. Les réalisateurs seront présents pour accompagner leur film.

Mardi 25, à 16h, au cinéma Le Club :

Me oa deut da vezañ hardizh, de Thierry Compain,

Documentaire / 2009 / 26mn / France 3 Ouest

Portrait d'Hélène Baudour. A travers son regard si particulier sur l'enfance, son expérience de petite bonne, sa connaissance de gwerz en breton et sa vie de femme de marin, Hélène est un de ces précieux témoins du temps. Avec esprit et humour, elle nous livre une sorte d'héritage culturel, un regard sur le monde qui nous entoure.

Mercredi 26, à 16h, au cinéma Le Club :

Leurenn BZH 2, de Sonia Larue

Produit par Pois Chiche Films, TV Rennes 35, Dizale, MALP, La Découverte

Deuxième saison d'une sitcom drôle et impertinente qui relate la vie et les coulisses d'un cabaret de seconde zone. Le ton est décalé, c'est décapant, fort en autodérision. Et qui plus est en breton !

Notre « coup de cœur » : « Super du pod »... Un super héros à l'affût des fautes. Pas facile d'être néo-bretonnant...

O seizh posubl, de Soazig Daniellou

Documentaire / 2008 / 52mn / Kalanna Production, France 3 Ouest

En 1997 l'association Diwan présentait au baccalauréat les premiers élèves à avoir effectué toute leur scolarité en breton. Aujourd'hui Alan, Blevenn, Maela et les autres ont bientôt trente ans. Ils ont tous un métier. La plupart vivent en couple. Certains ont des enfants. Qu'ont-ils fait et que veulent-ils faire de la langue qui leur a été confiée ? Le breton leur apparaît-il comme une chance, un fardeau ou bien les laisse-t-il indifférents ? Sont-ils prêts à se battre comme leurs parents pour la survie de leur culture ? Le film qui mêle images d'hier et d'aujourd'hui, s'approche au plus près de l'intimité de parcours personnels liés à une expérience commune forte vécue dans l'enfance.

Jeudi 27, à 18h30, à l'auditorium de la médiathèque :

Hent-dall, de Sébastien Le Guillou

Documentaire / 2008 / 15mn / France 3 Ouest

Prix du meilleur documentaire aux Prizioù France 3 Ouest 2009.

Ida et Guy font route ensemble depuis leur mariage il y a une trentaine d'années. Tous deux sont atteints de cécité. Le couple vit dans sa maison à Pluzunet. La vie quotidienne n'est pas simple, mais grâce à un entourage attentif et serviable, Ida et Guy sont autonomes ou presque. Chacun a sa passion : Guy joue de l'accordéon et Ida excelle dans la danse bretonne. Et leurs amis ne sont jamais bien loin...

Et aussi dimanche 23 : séance spéciale de l'INA Atlantique

Charlez Ar Gall, brezhoneger penn, kil ha troad, de Marie Kermarec

Documentaire / 2001 / 20mn / France 3 Ouest

Portrait du premier présentateur à parler breton à la télévision. Travailleur et militant infatigable, ce fils de paysan devenu instituteur, assume aussi la responsabilité d'émissions radiophoniques et restera à la télévision régionale jusqu'en 1974. Témoin et acteur, Charlez ar Gall se consacre essentiellement à un combat : celui de la langue bretonne.

Et aussi, projection du documentaire « **Histoire de la télévision régionale** » de Louis-Marie Davy et Patrick Gay (1990), suivie d'un débat sur la télévision en Bretagne.

